



C’HWEC’HVEIDI DIWAN, O FAMILHOÙ HAG AR BREZHONEG

Enklask kaset da benn etre miz Here ha miz Kerzu 2020

257 c’hwec’hvead eus Diwan

Rentañ-kont

Kenurzhiañ an enklask : Katell Chantreau (doktoradez Skol-veur Roazhon 2, CREAD)
Skoazell : Skolajoù Diwan, Nolwenn ar Borgn, Erwan ar Berr, David ar Gall, Gwenola Coic, Marine Gloaguen, Yves Kernalegenn, Sabrina Poherdy, Brendan Simon.

269 c’hwec’hvead a oa skoliataet er 6 skolaj Diwan en diskar-amzer 2020.
257 o deus respontet d’an enklask-se, bet kaset etre miz Here ha miz Kerzu 2020.

Skolajoù	Plijidi	Ar Releg	Kemper	Gwiseni	Sant-Ervlan	Gwened	Hollad
Niver a 6veidi	61	69	48	18	18	55	269
Niver a responentien	55	69	48	18	17	51	257
% a responentien	90 %	100 %	100 %	100 %	94 %	93 %	96 %

Pa vo graet anv eus ar skolajidi en danevell-mañ e vo dav kompren zo kaoz eus ar c’hwec’hveidi hepken.

Nebeut a-raok an enklask bet kaset er skolajoù Diwan e oa bet kaset unan all war ar memes temoù e lise Diwan Karaez (Chantreau & Grimault, 2020, Enklask Liseidi Diwan). Graet e vo anv eus an enklask-se en danevell-mañ evit keñveriañ disoc’hoù zo.

Rentañ-kont enklask Lise Diwan : www.treuzkas.net

TAOLENN

1. Ar skolajidi

- 1.1. Piv eo ar c’hwec’hveidi ?
- 1.2. Ar c’hwec’hveidi hag ar brezhoneg


2. Mammoù ha tadoù ar skolajidi

- 2.1. O barregezh war ar brezhoneg
- 2.2. Implij ar brezhoneg etre ar gerent hag o bugale
- 2.3. Neuz yezhel familhoù ar skolajidi

1. AR SKOLAJIDI


1.1. Piv eo ar c'hwec'hveidi ?

◆ Reizh




Diazez : 257 skolajiad
Lenn : 46 % eus ar c'hwec'hveidi zo paotred.

◆ Bloaz ganedigezh




Diazez : 257 skolajiad
Lenn : 227 c'hwec'hvead zo ganet e 2009, da lâret eo 89 % eus ar c'hwec'hveidi.

◆ Lec'h bevañ




Diazez : 257 skolajiad
Lenn : 61 % eus ar skolajidi zo o chom e Penn-ar-Bed.



Diazez : 257 skolajiad
Lenn : 89 % eus ar skolajidi zo o chom e Breizh-Izel.

◆ Skoliata kent



Diazez : 257 skolajiad

Lenn : 85 % eus ar c'hwec'hveidi a oa en ur skol Diwan e CM2.

Muioc'h a verc'hed zo e klasoù 6vet ar skoloù Diwan. De Singly en deus studiet ar skoliata « disheñvel », er-maez eus ar sistem klasel, hag en deus diskouezet e vez techet ar familhoù da vroudañ muioc'h ar baotred eget ar merc'hed da zistreiñ d'ar sistem klasel. Hag an is-never a baotred a vefe ur sin eus ar strategiezh-se ?


Dreist-dileuriet eo skolajidi Breizh-Izel. Lec'hiadur ar skolioù kentañ derez hag ar skoloù zo kaoz (1 skolaj diwar 6 zo lec'hiet e Breizh-Uhel). Bihan tout eo an niver a skolidi o chom en Il-ha-Gwilen, daoust ma vefe 3 skol lec'hiet eno. Pell emañ ar skoloù Diwan tostañ, ar pezh a lak an darn vuiañ eus skolidi CM2 Diwan da gitaat Diwan er skolaj.

85 % eus c'hwec'hveidi Diwan zo o tont eus skolioù Diwan. Skoloù Plijidi ha Gwiseni a zesach ar vuiañ a vugale o tont eus klasoù divyezhek publik pe brevez.

1.2. Ar c'hwec'hveidi hag ar brezhoneg


◆ O santimant war o live brezhonek

D'az soñj, da live brezhonek zo :



Diazez : 257 skolajiad

Lenn : 48 % eus c'hwec'hveidi skolaj ar Releg a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat a-walc'h.



Diazez : 257 skolajiad

Lenn : 43 % eus ar merc'hed a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat.

Evezhiadennoù : 91 % eus ar skolajidi o deus ar santimant o deus ul live mat pe mat a-walc'h e brezhoneg. En o aez e seblantont bezañ gant implij ar yezh skol, muioc'h eget liseidi Diwan zoken (72% eus al liseidi a gav dezho o deus ul live mat – 23% – pe mat a-walc'h – 48%).

Paotred ha merc'hed o deus ar memes sell tamm pe damm war o live brezhoneg. N'eo ket gwir an dra-se el lise ma vez 29% eus ar merc'hed ha 18% eus ar baotred a gav dezho o deus ul live mat.


C'hwec'hveidi skolaj Diwan Gwened o deus nebeutoc'h a fiziañs en o brezhoneg eget ar re all. Hag implij brezhoneg Bro-Gwened er skolaj a vefe kaoz ? A c'hellfe degas un tamm trubuilh er penn-kentañ d'ar re n'int ket kustum da implijout ar stumm-se... Er c'hontrol, al liseidi a zo tremenet dre skolaj Diwan Gwened o deus ar brasañ fiziañs en o brezhoneg (37% eus ar re bet e skolaj Diwan Gwened a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat padal eo 23% ar geidenn evit «live mat»).

C'hwec'hveidi Plijidi ha Kemper o deus ar muiañ a fiziañs enno e-keñver o live brezhoneg. Gwelet a raimp bremaik penaos e c'hellfe an implij brezhoneg er familh bezañ un abeg d'an dra-se.

◆ O santimant ouzh ar brezhoneg

Ar pezh a soñjez diwar-benn ar brezhoneg :

Plijet-tre on gant ar brezhoneg Plijet a-walc'h Etre an daou Ne ran ket forzh



Diazez : 257 skolajiad

Lenn : 56 % eus ar c'hwec'hveidi zo plijet-tre gant ar brezhoneg.



Diazez : 257 skolajiad

Lenn : 59 % eus ar merc'hed zo plijet-tre gant ar brezhoneg.

Evezhiadennoù : Niverus-tre eo ar c'hwec'hveidi a zo plijet-tre pe plijet a-walc'h gant ar brezhoneg : 91 % anezho ! Ne vezont ket digalonekaet pe heuget gant ar brezhoneg gant ar skoliata e Diwan, ar pezh a c'hallfe c'hoarvezout o c'houzout eo staget ar brezhoneg ouzh ar skol, ul lec'h rediet. Al liseidi eo tomm o

c'halon ouzh ar brezhoneg met un tamm nebeutoc'h (30% tomm-tre ha 49% tomm a-walc'h).


Pounneroc'h eo evito an traoù degaset gant ar framm skol marteze ?

N'eus ket diforc'hioù bras etre ar skolañoù. Un diforc'h bihan zo etre ar baotred hag ar merc'hed. Kalz bihanoc'h eget an diforc'h a vez gwelet el lise (37% eus merc'hed al lise ha 23% eus paotred al lise a zo tomm-tre ouzh ar brezhoneg, pezh a ra 14 poent diforc'h).

◆ Implij ar brezhoneg gant ar breudeur ha/pe ar c'hoarezed

Gant da vreur pe c'hoarezed e komzez brezhoneg ?

- Atav pe dost
- Kement e brezhoneg hag en ur yezh all
- A-wechoù
- Ne ran ket
- Ne ouzont ket brezhoneg
- N'em eus na breur na c'hoar



Diazez : 227 skolañiad o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg


Len : 29 % eus ar c'hwec'hveidi ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.

Evezhiadennoù : Boas eo ar braz eus ar skolañidi kaozeal e galleg gant o c'hoarezed pe o breudeur. Ar skolañidi e Diwan ne lak ket ar brezhoneg evel yezh kaozeal ordin etre ar c'hoarezed hag ar breudeur, met silañ a ra etrezo un implij ur wech an amzer evit an div drederenn anezho. Ar memes sifroù a vez kavet kostez al liseidi, tamm pe damm.

◆ Raktres treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale


Ma teus bugale un deiz bennak, e komzi brezhoneg outo...

- Atav pe dost
- E brezhoneg kement hag en ur yezh all
- A-wechoù
- Nebeut-tre pe james
- N'ouzont ket




Diazez : 257 skolañiad

Len : 12 % eus ar c'hwec'hveidi zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.



Diazez : 257 skolañiad

Len : 13 % eus ar merc'hed zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav



Diazez : 165 skolajiad o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale

Len : 24 % eus ar merc'hed o deus ur soñj sklaer war an treuzkas d'o bugale da zont zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

Evezhiadennoù : Ouzhpenn un drederenn eus ar c'hwec'hveidi n'o deus raksoñj ebet war ar yezh(où) a vo komzet gante ouzh o bugale da zont, ar pezh n'eo ket gwall estonus (gwall yaouank int c'hoazh !).

Souezhus eo 'vat gwelet ez eus muioc'h a baotred gant ur raksoñj sklaer, padal eo ar c'hontrol splann el lise (16% eus ar merc'hed ha 30% ar baotred hep raksoñj ebet).

Ma zo kaoz eus ar skolajidi o deus ur raksoñj hepken, e verzer e vez mennetoc'h ar merc'hed da dreuzkas kreñv ar brezhoneg d'o bugale (24% eus ar merc'hed evit komz atav e brezhoneg, ha 15% eus ar baotred). Ar memes tra a vez kavet gant al liseidi.

En o aez e vez skolidi c'hwec'hvet klas Diwan gant ar brezhoneg. Ar braz anezho a gav dezho o deus ul live mat pe mat a-walc'h e brezhoneg, hag a zo plijet-tre pe plijet a-walc'h gant ar brezhoneg. Diforc'hioù bihan zo etre ar skolajoù (santimant barregezh skolidi skolaj Gwened dreist-holl), met n'int ket diforc'hioù splann.

Diforc'hioù bihan a vez merzet etre ar merc'hed hag ar baotred ivez (santimant ouzh ar brezhoneg, raktres treuzkas). Pa seller ouzh disoc'hoù an enklask bet graet e Lise Diwan Karaez e c'heller soñjal ez aio an diforc'hioù-se war greñvaat a-hed ar bloavezhioù skolaj (lod eus ar baotred o pellaat diouzh ar brezhoneg). Gwelet e vez ar brezhoneg evel un danvez skol gant ar braz eus ar skolidi ha gouzout a raer e vez levezonet an doare bezañ er skol gant ar jener. An holl studiadennoù er Frañs a ziskouez e vez tommoc'h ar merc'hed ouzh ar skol eget ar baotred. Marteze e tigresk interes paotred zo ouzh ar brezhoneg a-hed ar bloavezhioù skolaj ha lise peogwir n'int ket plijet gant ar framm skol ?

2. MAMMOÙ HA TADOÙ AR SKOLAJIDI


Taolit evezh ! Er rannbennad-mañ e vo roet sifroù war an tadoù hag ar mammoù, war ar familhoù ha war ar skolajidi. Sellit mat ouzh diazez pep grafik.

Mammoù : etre 1964 ha 1989 int ganet. 1978 eo ar geidenn vloaz.

Tadoù : etre 1955 ha 1988 int ganet. 1976 eo ar geidenn vloaz.

2.1. 0 barregezh war ar brezhoneg

◆ Ha goût a reont brezhoneg ?



Diazez : 253 mamm ha 252 tad (505)

Len : 20 % eus kerent ar c'hwec'hveidi a oar brezhoneg mat.

Evezhiadenn : Un drederenn eus an tadoù ha mammoù a oar brezhoneg kazimant. Ar memes dregantad evel tadoù ha mammoù liseidi Diwan.


2.2. Implij ar brezhoneg etre ar gerent hag o bugale

N'eo kemeret e kont amañ nemet an tadoù hag ar mammoù a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h hag ar skolidi o deus tadoù ha/pe mammoù brezhonek.

79 mamm vrezhonek a zo. 32 % eus ar skolajidi o deus ur vamm a oar brezhoneg (55 ur vamm hag a oar mat, 26 a oar mat a-walc'h).

71 tad brezhonek a zo. 28 % eus ar skolajidi o deus un tad a oar brezhoneg (50 un tad a oar mat, 23 a oar mat a-walc'h).

◆ Ha komz a ra an tadoù ha ar mammoù brezhoneg ouzh o bugel ?



Diazez : 79 mamm ha 71 tad (150)


Len : 15 % eus mammoù brezhonek ar skolajidi a gomz brezhoneg d'o bugel atav.

Evezhiadennoù : Ar braz eus ar gerent vrezhonek ne dreuzkasont ket ar yezh d'o bugel (56 % komz brezhoneg a-wechoù pe james). Diskouez a reont d'ar skolajidi e c'hell bezañ un diforc'h etre anavezout ur yezh hag ober un implij sokial anezhi. Un diforc'h bras zo etre an tadoù hag ar mammoù : 57% eus an tadoù ha 33% eus ar mammoù a dreuzkas ar brezhoneg d'o bugel. Abegoù an diforc'h-se zo o vezañ studiet : ar fiziañs en e/he barregezh, ar mod hag ar mare deskiñ, ar perc'hennañ yezh don ha war-c'horre, ar pezh er stourm, sell ar pried... Damheñvel eo sifroù an treuzkas gant kerent liseidi (un tamm bihanoc'h a-berzh ar mammoù).

◆ Ha komz a ra ar skolajidi e brezhoneg ouzh o zud ?

Ha komz a rez brezhoneg ouzh da vamm ? [ouzh da dad ?]

Atav pe dost Kement e brezhoneg hag en ur yezh all A-wechoù Ne ran ket



Diazez : 81 skolajiad (evit ar vamm) ha 73 skolajiad (evit an tad)

Len : 15 % eus ar skolajidi e oar brezhoneg o mamm a gomz brezhoneg outi atav pe dost.

		Ar vamm a gomz e brezhoneg ouzh he bugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he mamm	Atav	67 %	21 %	0	0
	Kement hag en ur yezh all	8 %	50 %	0	0
	A-wechoù	17 %	29 %	90 %	25 %
	James	8 %	0	10 %	75 %

Diazez : 81 skolajiad

Len : 17 % eus ar skolajidi o deus ur vamm a gomz brezhoneg oute atav a gomz outi e brezhoneg a-wechoù.

		An tad a gomz e brezhoneg ouzh e vugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he zad	Atav	75 %	6 %	0	0
	Kement hag en ur yezh all	8 %	75 %	3 %	0
	A-wechoù	17 %	19 %	97 %	0
	James	0	0	0	100 %

Diazez : 72 skolajiad

Len : 75 % eus al liseidi o deus un tad a gomz brezhoneg oute atav a gomz outañ e brezhoneg atav.

Evezhiadennoù : An darn vrasañ eus ar skolajidi o deus ur pleustr yezhel heñvel ouzh hini o zud. Ma vez komzet e brezhoneg outo atav gant o zud e respontont e brezhoneg atav peurliesañ. Pa ne vez ket ar memes pleustr yezhel e vez ar skolajidi a gomz nebeutoc'h eget o zud peurliesañ. Meur a abeg a c'hell bezañ d'an dra-se : diouer a varregezh yezh evit lâret kement tra a zo da lâret, strategiezh enebiezh a-berzh ar vugale, strategiezh ar gerent n'o deus ket broudet kement-se implij ar brezhoneg gant o bugale...


2.3. Neuz yezhel familhoù ar skolajidi

257 skolajiad zo met 253 « familh » hepken kar 4 daouad breur / c'hoar a zo. « familh » vo graet eus an **253 koublad teorik tad-mamm**, daoust ma'z eo dispartiet lod eus ar c'houbladoù-se.

◆ Barregezh ha treuzkas


Pevar rummad familhoù zo bet savet :

- BZG T : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg hag a zreuzkas ar yezh d'o bugel (1 treuzkaser pe 2 er familh).
- BZG : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg met ne dreuzkasont ket d'o bugel.
- BZG- : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg un tammig.
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.



Diazez : 253 familh

Lenn : E 21 % eus ar familhoù e oar brezhoneg an tad ha/pe ar vamm hag e treuzkasont ar brezhoneg d'o bugale (an tad ha/pe ar vamm a gomz brezhoneg d'o bugel atav pe kement hag ur yezh all).




Diazez : 253 familh

Lenn : E 36 % eus familhoù skolaj ar Releg eo divrezhonek an tad hag ar vamm.

Evezhiadennoù : 48% eus familhoù ar skolajidi ez eus un tad pe ur vamm (pe an daou) a oar brezhoneg. Padal n'eus nemet 21% eus ar familhoù ma'z en deus choazet an tad pe ar vamm pe an daou komz brezhoneg d'ar vugale atav pe kement hag en ur yezh all.


E skolajoù Naoned, Plijidi ha Kemper ez eus ar muiañ a dadoù ha mammoù brezhoneg hag eo ar c'hreñvañ an treuzkas er familh. E skolaj Gwiseni n'eus familh ebet a dreuzkas brezhoneg d'o bugale, ar pezh a c'hell seblantout drol a-walc'h.

◆ Niver a dreuzkaserien er familhoù



Diazez : 253 familh

Len : 22 % eus ar familhoù a dreuzkas ar brezhoneg d'o bugale (an tad ha/pe ar vamm a gomz brezhoneg d'o bugel atav pe kement hag ur yezh all).




Diazez : 253 familh

Len : E 10 % eus familhoù c'hwec'hveidi Skolaj Gwened eo vez treuzkaset ar brezhoneg d'ar vugale gant an tad hag ar vamm.


◆ Live an treuzkas er familhoù

Mamm / tad	Atav	50 %	A-wechoù	James
Atav	Treuzkas kreñv			
50 %		Treuzkas etre		
A-wechoù			Treuzkas gwan	
James				N'eus ket



Diazez : 253 familh

Lenn : 64 % eus ar skolajidi ne vez ket treuzkaset dezho ar brezhoneg gant o zud tamm ebet.



Diazez : 253 familh

Lenn : E 6 % eus familhoù c'hwec'hveidi skolaj Gwened e vez an tad hag ar vamm o treuzkas ar brezhoneg d'o bugel.

Evezhiadennoù : N'eus nemet 8 familh war 253 ma vez ar brezhoneg yezh pennañ pe yezh nemeti komzet d'o bugel gant ar gerent, padal ez eus 29 familh ma oar tad ha mamm brezhoneg mat pe mat a-walc'h. Pezh a ziskouez n'eo ket trawalc'h e vefe gouezet brezhoneg gant an daou bried evit ma vefe plantet brezhoneg en ti da vat. E 7 familh eo ar brezhoneg yezh ar c'houblad, e 3 familh e vez implijet ar brezhoneg er c'houblad kement hag ur yezh all.

Ar memes disoc'hoù a gavomp gant familhoù c'hwec'hveidi Diwan evel gant familhoù liseidi Diwan : e kazimant 50% eus ar familhoù ez eus un tad ha/pe ur vamm a oar brezhoneg, e 20% eus ar familhoù e vez treuzkaset ar brezhoneg gant an tad ha/pe ar vamm, kreñvoc'h eo an treuzkas a-berzh an tadoù eget a-berzh ar mammoù. Hollbouezus eo kompren eus pelec'h e teu an diforc'h etre ar barregezh komz hag an treuzkas er familh, memes pa vez brezhoneg gant an daou bried.